

KORN AR BREZONEG

MARV EO JEGO

Bim, Bam Kloc'h Roc'h
 Spontail er broc'h
 Marv eo Jego
 Mari Bego
 Marv eo Jego, Jego gez
 Marv eo toud e vadelez
 Marv eo ar c'hwilet dero
 Dindan rojou kar 'n Ankou
 Marv eo Jego ma mignon
 Dindan pouez ar vuhez don

*Le Pays Breton
 Kerze 1972*

Bim, Bam Kloc'h Roc'h
 Spontail er broc'h
 Marv eo Jego
 Mari Bego
 Aet eo e benn gant ar hi
 Trezek pardon Zant-Gili
 Piou digasou va hini
 Beteg amzer va mehi
 Beteg amzer koz Jego
 War hent meinig Miliniou
 He na n'han ken mui en dro.

Bim, Bam Kloc'h Roc'h
 Spontail er broc'h
 Marv eo Jego
 Mari Bego
 Aet eo e benn gant ar c'hi
 Trezek pardon Zant-Gili
 Act eo Mari war e lerh
 He zreit noaz ebarz an erh
 Gant ar sklinsen bara lez
 Da la'rout d'an didalvez
 Debret bara evet lez
 Lez't e benn gant Jego gez.

s.
s
t
2
i
1
1

Bim, Bam Kloc'h Roc'h
 Sontail er broc'h
 Jego maro
 Mari Bego
 Ro c'hoas 'r wech din
 Da dorn braz yen
 Breman c'helan la'rout dit
 Pegen aaset pegen don
 Hay da daoliou 'n em c'halon
 Taio, Taio, c'hwi lezit
 Jodou tener ma mignon
 Deuet eo miz du, deuet eo
 [noz
 Man Jego er Baradoz
 Bim Bam Kloc'h Roc'h

AR C'HORRIGAN